

ARVOR

Netra na den ne vir ouzhimp da vont war-du ar pal

PERAK ?

Perak n'eus ket bet roet tredan da ARVOR, keit ha ma vez roet da gelaouennoù sizhuniek all ?

Peogwir, sur a-walc'h, ez eo moulet ARVOR e Brezhoneg, ha c'hoant ar Jakobined eo ma vo mouget ar Brezhoneg.

Hogen, ar Vrezhoned a zo pennoù kalet.

Daoust da bep tra, e pep korn a Vreizh, evel un taol-trompilh da c'hervel pep unan d'ar stourm, e tasono hor youc'hadenn :

" Ma fell d'ar Jakobined peurziskar hor yezh, ur fazi o deus graet. Ne c'hounezet netra oc'h ober goap d'ar Vrezhoned "

AR BREZHONEG ? Enebour Niv. I ar Jakobined

*Embannet ha Merour : Gw. BERTHOU. Niv.-voudoù : 2; niv.-embaas. : 1.
Kasadennoù-tre : 2^e termiziad 1944. Ti-MOULBREZH KREIZ-Kêr ROAZHON
Aotre : P. C. 500.*

Kendalc'h Framm Keltiek Breizh

e ROAZHON eus an 18 d'an 21 a viz Mae
en deus graet UR BERZH DISPAR

Diskouezet eo bet gant tud hor bro e ouzont derc'hel penn, daoust da bep tra.

BLEUNIOU HA BROUD DA GENLABOURIEN 'ARVOR'

Da genver Kendalc'h bras ar « Framm Keltiek » diwezhan, e kêr Roazhon, e oa deut pennskrivagner « Arvor » gant ur c'haer a strobad bleunioù da ginnig d'e genlabourerien.

Niverus eo ar re-man. N'eus nemet sellout ar sinadurioù.

Niverus int ha skrivagnerien a ouenn vat.

Deut e oamp gant ar sonj d'o bokedin gant bleunioù ar veuleudi. Padal, setu ma lavarer deomp ne vo ken a « Arvor ».

Lakaat ar bleunioù, neuze, da dalvoud da gurunenn war vez ur gazetenn lazhet e barr he yaouankiz ?...

Nann, avat ! Er rozenn ez eus drein.

Diwallit ar vleunienn, kenlabourerien gêr !

Ni, avat, gant an drein a vroudo ac'hanoc'h... mar bez ezhomm, evit ma kendalc'hot da labourat ha da gas, seul-well, pennadoù da « Arvor ».

ARVOR.

KENVROIZ !

En em lakait e-barzh

BAGAD AR FIZIAÑS (Savet gant Framm Keltiek Breizh)

Darn ac'hanoc'h a vo kaset dezho
ul lizher dizale !